

Volun'tour : eus an eil Penn-ar-Bed d'egile war varc'h-houarn-gourvez (article également proposé en français sous le titre "Volun'tour : le vélo couché, plus que du sport")

dimanche 14 avril 2013

par [0292257w-4emeGLAS \[spip.php?auteur190\]](mailto:0292257w-4emeGLAS@spip.php?auteur190)



Foetañ 18 000 km hent etre Brest hag Ha Noi, o vont dre 22 vro. Sebezus, dreist-holl pa soñjer o deus divizet daou zen yaouank dornañ an tennad hent-se war varc'h-houarn-gourvez.

Ebrel 2012/Ebrel 2013 : abaoe bloaz emañ Gwilhom Danteg, ur plougastellad 27 vloaz gant e VOLUN' TOUR* [2], ur c'hlaoustre sport, plijadur oc'h en em gavout gant tud a bep seurt, met ouzhpenn an dra-se 'zo. Rak ar pal 'zo ivez dastum arc'hant evit an enklaskoù ouzh ar mukovisidoz ha bevañ un dro-gaer gant bugale an ospitalioù, ar skolioù. Ar volun'tour-se en deus aozet asambles gant Felix Burgos Tena, ur spagnolad 26 vloaz, graet anaoudegezh gantañ e Roumania, p'edo gant e servij europat a youl-vat.

Daou vloaz int bet oc'h aozañ ar raktres, o klask kevelerien ha yalc'hadoù, o serriñ an dafar, o wellaat ar c'hezeg-houarn, o klask titouroù diwar-benn ar c'hretadurioù, ar visaioù, ar brec'hioù. « N'eo ket prientiñ ar c'horf ar pep diaesañ, eme Wilhom. Bezañ mennet-start eo ar pep pouezusañ evidon-me. **Ret eo bezañ yac'h, met n'eus ket ezhomm bezañ ur sportour meur.** A-raok din loc'hat e raen troiadoù 70 km. Bremañ, gant ar skiant 'm eus prenet gant an dervezhioù-se war varc'h-houarn ez an betek 110 km war ar c'hompez, aes ha didrabas. »



(foto : Gwilhom Danteg) Ysyk Köl / Kreiz Azia : Erru eo Gwilhom ha Felix war hent ar seiz.

Perak mont gant ur marc'h-houarn-gourvez ?

« Ne oa ket Felix evit mont gant ur marc'h-houarn ordinal, da heul un oberatadenn. Ne oa ket da zibab 'ta, ma felle deomp ober hon troiad war varc'h-houarn. Ha n'hon eus bet tamm keuz ebet abaoe », a zispleg Gwilhom.

Pa vez gourvezet an den, **n'en devez ket poan en e gigennoù, en e gein, nag en e choug, hag aesoc'h dezhañ sellet ouzh ar vro.** Izeloc'h 'vez azezet eget war ur marc'h-houarn boutin avat, ha ne wel ket kement en adreñv. Mes diskoulmoù 'zo : bannieloù, ur vazh ouzh ar c'hostez, kilsellerioù.

Dafar a-feson 'zo aet gant Gwilhom ha Felix evel-just. Ar c'hezeg-houarn da skouer, n'int ket bet graet gant aluminiom mes gant dir. Pounnerik int, mes gwelloc'h e talc'hont ouzh ar stokadennoù, hag aes d'un den dresañ anezho en e-unan, trawalc'h gouzout soudiñ un tamm bennak. Ar goloioù-rod, Schwalbe Marathon anezho, 'zo bet kreñvaet, ha ne doullont ket kement. « Ar marc'h-houarn ken a goust 2000 euro. Ur guchenn vray a arc'hant eo, mes n'eus **takenn tireoul ebet da brenañ, tamm saotradur ebet, aes ober war e dro e-keñver ur c'harr-tan, hag ouzhpenn-se e chom yac'h an dud.** »

Ar marc'h-houarn-gourvez : ur skiant da veajiñ

Daoust ma pad ar veaj, e talc'hont d'o bugjed orin, dre ma vevont pizh, ma kouskont e ti an dud peurvuiañ, pe en o zeltenn da zispign nebeutoc'h. « **Diwar nebeut a-walc'h e vevomp, hep tailhañ war ar bevañs avat, rak boued hor c'heflusker eo, hag hor plijadur da heul un dervezh war varc'h-houarn.** »

Gant triadoù a-seurt-se e vez gwir emgavioù, evel gant « Lulu, ur paotr 75 vloaz, o veajiñ gant e azen » pe gant « beajourien all, troet heñvel o spered ». Ha Gwilhom da lavaret ouzhpenn : « Fromet e vezan atav, pa vez kinniget deomp ur bod tomm, goude un dervezh hir o sevel gant krec'hioù ! Evel e ode an Taldyk e Kirgizistan n'eus ket keit-se. »

Ar veaj-mañ, eviti da vezañ tenn evit ar c'horf, n'eo ket ur redadeg. Felix ha Gwilhom a embann fraezh int « **beajourien war varc'h-houarn, ha n'int ket marc'houarnerien o veajiñ** ». Diouzh an heol e plantont tizh en o zroadikelloù, 5 eurvezh bemdez da nebeutañ er goañv, ha betek 7 eurvezh en hañv, a-sav e chomont da sellet ouzh ar vro ha da ziskuizhañ. « Tardañ a c'hellomp p'hon devez naon, sec'hed, pe c'hoant ober ur poltred ken ».

Kredapl e kavo o zud anezho gwall cheñchet pa zistroint, dezho un doare all da blediñ gant kudennoù ar vuhez. « Tenn e vez evit ar c'horf sevel betek an odeoù er menezioù. **Mes nag a blijadur p'en em gavomp war-laez, o sellet ouzh ar vro ! Nerzh evit mont pelloc'h.** ». Ha Gwilhom da lavaret ouzhpenn : « Anaout a ran gwelloc'h va c'horf. Gouzout a ran betek pelec'h e c'hellan mont. Gant poan hag amzer, ... a-benn a bep tra e teuer... Arabat klask kaout pep tra diouzhtu ; ne c'heller ket, ha ne vije tamm plijadur ebet ken. »

Nag an distro ?

Lavaret en deus Gilbert Danteg, tad Gwilhom, **ne ouezont ket c'hoazh peur e tistroint, ha n'emaint ket e soñj ober a-raok 6 miz amañ**. Mes n'eus ket da vezañ nec'het ganto, rak darempred a zalc'hont dre vail, Skype, pe o fellgomzer hezoug. Ur valizenn Spot 'zo ganto zoken, peadra da vezañ geolec'hiet.

Ha n'eo ket homañ o beaj ziwezhañ, 'toare : « **Bras-divent eo ar bed ! Ha seul vui e veaj an den, seul vui e wel ne oar netra !** »

4re Glas (skolaj Diwan - Relecq-Kerhuon)

[1] *Volun'tour / www.voluntour.eu/ [http://www.voluntour.eu/] : lec'hienn Gwilhom ha Felix, enni kalz titouroù diwar-benn o raktres

[2] *Volun'tour / www.voluntour.eu/ [http://www.voluntour.eu/] : lec'hienn Gwilhom ha Felix, enni kalz titouroù diwar-benn o raktres

Portfolio

